

PAOL VI

**LIZHER**  
**OCTOGESIMA ADVENIENS**

Eikontvet deiz-ha-bloaz  
embannadur RERUM NOVARUM

Troidigezh gant  
G. CHEREL ha G. ETIENNE

**PREDER**

Kaier 148

Here 1971

PAOL VI

**LIZHER**  
**OCTOGESIMA ADVENIENS**

Eikontvet deiz-ha-bloaz  
embannadur RERUM NOVARUM

Troidigezh gant  
G. CHEREL ha G. ETIENNE

**PREDER**

Kaier 148

Here 1971

P A O L     V I

L I Z H E R

O C T O G E S I M A     A D V E N I E N S

d'an Aotrou Kardinal Maurice ROY, Kadoriad  
Kuzul al Liked ha Kengor pabel "Yonez ha Peoc'h" da  
geñver eikontvet deiz-ha-bloaz ar C'helc'hlizher  
"Rerum novarum".

Aotrou Kardinal,

1 Eikontvet deiz-ha-bloaz embannadur  
RERUM NOVARUM a gendalc'h da atizañ an ober evit Yonez ar  
gedvuhez a ro dimp tro da askemer ha da glokaat kelennadur-  
ezh hon diaraogerion a-benn bastañ da ezhommoù nevez ur bed  
war gemm. E gwir ez a an Iliz en ur ser gant an denion, o  
chom kendonkad ganto en Istor. En ur gemenn Keloù mat karantez  
Doue hag ar Silvidigezh er C'hrist, e taol war vuhez an  
dud sklerijenn an Aviel ha dre se en o skoazell da vezañ  
diouzh youl ha karantez Doue ha da beurseveniñ o iziunadoù.

Galv hollvedel d'ur yonez vrasoc'h.

2 Gant fiziañs e welomp spered an Aotrou o kenderc'hel gant e oberenn e-touez an dud ha bodañ dre-holl kumuniezhoù kristen emouiziek ouzh o atebegzhioù er gevredigezh. War an holl gevandirioù en holl ouennoù, broadoù, sevenadurioù, en holl gendereoù, e kendalc'h an Aotrou da enaouiñ ebestel diles an Aviel.

An dro hon eus bet da gejañ ganto, d'o c'halon-ekaat, da estlammiñ ouzh o oberoù, da geñver hon beajoù diwezhañ. Tostaet hon eus d'an engroezioù ha klevet o galvoù, anezho garmoù enkrez ha goanag war an dro. En amveziadoù-se, kudennoù grevus hon amzer zo anadet dimp en un doare nevez, evel dibarek da bep ranndir, ha boutin koulskoude d'an denelezh a-bezh prederiet gant he dazont, gant ster an degemmadurioù a c'hoarvez. Disparelezhioù splann a chom a-fet diorreadur armerzhel, sevenadurel ha politikel ar broioù : e-kichen rannbarzhioù greantelaet bras ez eus reoù manet en oadvezh koueriadel ; e-kichen broioù gant ur barr-bevañ uhel, e stourm re all ouzh an naonegezh ; e-kichen pobloù gant ur barr-stuziadur uhel, ez eus bepred re all o klask dizarbenn an diskolerezh. A bep tu e sav ar c'hoant d'ur yonez vrasoc'h, ar goanag d'ur peoc'h diogeloc'h, er gendoujañs etre an dud hag ar pobloù.

Diseurtiezh saviadoù ar gristenion er bed.

3 A dra sur, diseurt bras eo ar saviadoù ma vez ar gristenion dre gaer pe dre heg, hervez ar ranndirioù, ar reizhiadoù kevredigezhel-politikel, hervez ar sevenadurioù. Amañ, ez int rediet da devel, diskred warno, dalc'het e-maez

ar gevredigezh, sterniet hep frankiz en ur reizhiad aotrou-  
niek. Aze, emaint ur bihanniver diaes dezho bezañ klevet.  
E riezoù all, ma vez anavezet an Iliz hag a-wechoù ent  
kefridiel, e c'houzañv heuliadoù an enkadenn a laka brall  
er gevredigezh ha hoalet eo reoù 'zo eus hec'h izili gant  
diskoulmoù gwriadiak ha feuls a welont evel ar re wellañ.  
Tra ma striv tud 'zo, o tianaout an direizhderioù, da  
zerc'hel ar saviad o ren, e vez hoalet reoù all gant keal-  
iadurezhioù dispac'hel a ginnig dezho, ha n'eo ket hep  
tousel, ur bed gwelloc'h da vat.

4 Dirak saviadoù ken diseurt eo diaes dimp ober  
gant an hevelep lavar ha kinnig un diskoulm en defe un  
dalvoudegezh hollvedel. Aze n'emañ ken hon arvez, na zoken  
hon c'hefridi. Dlead ar c'humuniezhoù kristen eo dezrannañ  
ergorek aoz o bro, teurel warni sklerijenn komzoù digemmus  
an Aviel. Dezho da ziorren pennaennoù o freder, reolennoù  
o barnerezh, sturiadurioù o obererezh diwar gelemmadurezh  
kevredigezhel an Iliz evel ma'z eo bet danzeet a-hed an  
istorvezh hag an oadvezh greantel pergen, a-c'houde deiziad  
istorek kiminiadezh Leon XIII war "dere ar vicherourion" hon  
eus an enor hag al levenez da lidañ hiziv an deiz-ha-bloaz  
anezhi. D'ar c'humuniezhoù-se da ziverzout, gant harp ar  
Spered Glan, a-unan gant an eskibion gret, a-genlabour  
gant ar vreudeur gristen all hag an holl dud a youl-vat,  
an dibaboù hag an engouestloù dereat, evit kas da benn an  
treuzfurmidigezhioù kevredigezhel, politikel hag armerzhel  
ret ha mallus e meur a dro. E seurt imboure'h evit luskañ  
ar c'hemoù ret, e tleo ar gristenion kadarnaat a-raok pep  
tra o fiziañs e nerzh hag e dibarelezh erverkadoù an Aviel.  
Hemañ n'eo ket dispredet war zigarez ma'z eo bet kemennet,  
skrivet, buhezet en ur metou kevredigezhel ha sevenadurel

disheñvel. Nevez e chom bepred e awen, pinvidikaet gant  
kantouezadur an hengoun kristen a-hed ar c'hantvedoù evit  
kristenaat an dud hag araokaat ar gedvuzeh hep ma teufed  
evit kelo d'e arverañ a-ser dibaboù amzeriat goubarzhel oc'h  
ankouaat e giminiadezh hollvedel ha peurbadel.(1)

Kiminiadezh spesadek an Iliz.

5 Er strafuilhoù hag em amzivinoù a vremañ, he deus  
an Iliz ur giminiadezh diouti da embann, ur skor da reiñ  
d'an dud en o strivoù evit gannañ ha sturiañ o zonkad.  
Abaoe ar mare ma tiskulie RERUM NOVARUM gant nerzh hag aotrou-  
niezh, droukskouer dere ar vicherourion er gevredigezh  
c'hreantel war he diwan, dedroadur an istor en deus lakaat  
da emouezañ ouzh domanioù ha dedalvezadurioù all eus ar  
yonez kevredigezhel, evel m'henn stade endeo Quadragesimo  
Anno (2) ha Mater et Magistra (3). Ar Sened Meur diwezhañ  
en deus strivet evitañ d'o lakaat fraezh, er Vonreizh  
pastorel Gaudium et Spes. Ni hon-unan hon eus roet astenn  
d'ar sturiadurioù-se gant hon c'helc'hlizher Populorum  
Progressio. "An devoud pennañ, emezomp, dav d'an holl hiziv  
emouezañ outañ, eo emañ deuet ar gudenn gevredigezhel da  
vezañ unan hollvedel (4)". "An Iliz, diwar-bouez ar skiant  
renevezet he deus prenet eus kemenoù an Aviel, zo rediet  
da vont en arempred an denion, evit o skoazellañ da vezout  
holl arvezioù ar gudenn c'hrevus-se, ha d'o c'hendrec'hiñ  
ez eo mallus ren un ober kengred, war dreuzoù ur prantad  
ken tonkus evit istor an denelezh (5)". An dlead-se, emoui-  
ziek lemm ma'z omp outañ, hon degas da ginnig un nebeut  
prederiadennoù hag alioù dirak kudennoù bras ar bed a  
hiziv.

6 A-hend-all e vo roll ar Senez Eskibion a zeu studian a-dostoc'h ha donaat kefridi an Iliz dirak kudennoù loskus ar yonez er bed . Deiz-ha-bloaz RBRUM NOVARUM a ro an dro dimp da fiziout hiziv ennoc'h, Aotrou Kardinal, hon damantoù hag hon prederioù war ar gudenn-se, ennoc'h-c'hwia a zo kadoriad Kengor Fabel "Yonez ha Peoc'h" ha Kuzul al liked. Dre se e vennomp kalonekaat ivez an aozadurioù-se eus ar sez Santel, evit o ober ilizel e gwazonezh an dud.

Amplded an degemadoù a vremañ.

7 E-se, hon pal - hep ankouaat evit kelo ar c'hudenn-ou hollbad studiet c'hoazh gant hon diaraogerion, - eo tennañ an evezh war un nebeut krefen a zle bezañ penndamant ar gristenion er bloavezhioù a zeu en arbenn eus o mallusted, o amplded hag o c'hemplezhded, evit m'en em roint da ziluziañ, gant an dud all, an diaesterioù nevez a laka en arvar dazont mab-den. Ret-mat eo savlec'hiañ ar c'hudennou kevredigezhel stignet gant an armerzh arnevez :  
- aozioù denek ar c'henderc'herezh, reizhded en eskemm ar madoù hag e dasparzh ar pinvidigezhioù, ster an ezhommoù-beveziñ war gresk, rannadur an atebegzhioù e stern ledanoc'h ur sevenadurezh nevez. E-kreiz an degemadoù a vremañ, ken don ha ken herrek, an den a zizolo bezañ nevez bemdez, hag en em aters war ster e hanvoud ha war e zrestbevañ stroll-ennel. Diegi en deus o tegemer kentelioù un tremened dispredet ha re zisheñvel d'e veno, ha neozh en deus ezhomm sklerijennañ e donkad, merzet diasur ha fiñvus gantañ, gant gwirionezioù hollbad, peurvad, a ya dreist dezhañ, e gwir, met ma c'hell adkavout ar roudoù anezho mar kar (6).

## KUDENNOU KEVREDIGEZH NEVEZ

Ar c'hêriekaat

8 Un anadenn a bouez bras a denn hon evezh : ar c'hêriekaat, ken er broioù greantelaet, ken er broioù war ziorren. Goude kantvedoù hir ez a war wanaat ar stuzegzh ploueel. Ha damantet e vez a-walc'h ouzh aozañ ha gwellaat buhez ploueziz : o dere armerzhel izel ha tavantek a-wezhioù a zegas d e heul un divaeziadeg etrezek ar bannlevioù jeneprus ma vezont tolpet hep gourc'hwel na lojeiz ? Seurt divaeziadeg padus, kresk ar greanterezh, bount diastal ar genel, hoaladur ar c'hêrioù a zisoc'h gant tolpadurioù poblañs bras dreistijin, ken ma vez anv eus meurgêrioù, enno dekmilionoù a dud. A dra sur ez eus kêrioù mentet e doare da reiñ ur c'hempouez gwelloc'h d'ar boblañs. Enno e c'hell an dud disc'hwelet gant arsakadennoù ar gounezerezh kavout labour, hag e c'hell an amva denel bezañ terket a-benn hepkoriñ ar proleterekaat hag ar yoc'hiñ en tolpadoù bras.

9 Mont a ra kresk diroll ar c'heodedoù-se war an dro gant emastenn ar greanterezh hep bezañ an un dra. Diazezet war an imbours'h kalvezoniell ha treuzfurmidigezh an natur, ez a ar greantelaat atav war-raok, broudet gant ur spered-krouiñ didorr. Tra ma vez embregerezhioù o tiorren hag o tolpañ, reoù all a ya da get pe a vez dilec'hiet, pezh a zegas kudennoù kevredigezhel nevez : dilabour

micherele pe ramndirel, dastroadur ha treuztiriadur, azasadur diastal al labourerion, disparelezhioù an dereoù e skourroù disheñvel ar greanterezh. Ur c'hevezerezh divuzul, o voaziañ an araezioù-brudañ arnevez, a laka kenderc'hadoù nevez dizehan en nevid, a glask lorbiñ ar vevezerion, tra ma'z a didalvoud ar greantioù kozh, hag int e-ratre c'hoazh. Tra ma ne c'hell gwiskadoù ledan eus ar boblañs bastañ d'o ezhommoù kentael, ez itriker da grouiñ ezhommoù dreist. E c'haller neuze en em c'houlenn gant gwir abeg ha daoust d'e holl drec'hioù, ne dro ket an den enep dezhañ frouezh e oberiantiz. Goude diogeliñ e c'halloud ret war an natur (7) daoust ha ne zeu ket da vezañ sklav d'e oberiadoù ?

#### Ar gristenion er geoded

10 Daoust ha diwanadur trumm ur stuzegezh kêrel o vont war un dro gant kresk ar bed greantel, n'eo ket un daoadenn da furnez an den, d'e varregezh-frammañ, d'e ijin-imbourc'hiñ ? Er gevredigezh c'hreantel, gant ar c'hêriekaet e vez eilpennet ar stuzioù hag emframmoù boas ar vuhez : ar familh, an amezegiezh, sternioù ar gumuniezh kristen o-unan. An den a c'houzañv un digenvezded nevez, n'eo ket mui a-dal d'un natur digar en deus mestroniet goude kantvedoù, hogen a-dal d'un engroez dizanv en gronn, ha ma en em sant estren . Ar c'hêriekaet hag eñ ul lankad dieiltro moarvat e diorreadur ar c'hevredigezhioù, a laka kudennoù diaes da vab-den : penaos mestroniañ e gresk, recliata e urzhiadur, e gas da benn evit mad an holl. E seurt kreskidigezh dizurzh, e vez ganet proleteriezhoù nevez. En em staliañ a reont e-kreiz ar c'hêrioù dilezet a-wezhioù gant ar binvidion; kampiñ a reont er fabourzioù,

gourizad tavantegezh o c'hronnañ pompad feukus ar c'heodedoù-beveziñ ha -foranañ gant o c'hlemmarc'hadur didrouz c'hoazh. E-lec'h aesaat ar c'hejañ breurek hag ar genskoazell, e ro lañs ar c'hêrioù d'ar gwallziforc'hioù ha d'an digasterioù ; e ro tro da zoareoù-korvoiñ ha -mestroniañ nevez ma vez tud oc'h arvokañ war ezhommoù ar re all, a denn diouto korvadoù dizegemeradus. A-dreñv talbennoù an tiez e chom kuzhet kalz reuzeudigezhioù dianavezet zoken gant an amezegion nesañ ; re all ez eus, dizolo o kas da goll briegezh mab-den : fellerezh, torfederezh, dram, orgederezh.

11 Ar re wanañ eo a zo e gwirionez reuziet gant aozioù buhez dizenekaus, displeberus evit an askredoù ha noazus ouzh ensavadur ar familh : an toueziadur er rannioù poblel a harz ouzh an disterañ nesaegesh ; an tiadoù yaouank, dre c'hortoz en aner ul lojeiz dereat ha marc'hadmat, a goll o deltu ha lakaet e vez o unaniezh en arvar ; ar yaouankiz a dec'h diouzh un caled re enk o klask war ar straed digolloù ha kenseurtizoù direoladus. Dlead grons an atebegion eo klask mestroniañ ha sturiañ an argerzh-se. Mallus eo adkrouiñ e par ar straed, ar rangêr, ar gourannezad, ar steuenn gevredigezhel o klotañ gant ezhommoù personelezh mab-den. Kreizennoù kendeur ha stuziadur zo da grouiñ e-barzh ar c'humuniezhoù, ar parrezioù, e stummoù diseurt ar c'hevarzheoù, ar c'helc'hioù-dudi, an emvodadegoù, ar c'hejadegoù speredel ha kumuniezhel ma adkrouo pep hini, o tec'hout diouzh an digenvez, darempredoù breurek.

12 Sevel ar geoded hiziv, lec'h buhez an dud hag o c'humuniezhoù ledanaet, krouiñ modoù-nested nevez,

emouiziekat ouzh un dedalvezadur dibar eus ar yonez kevredigezh-  
el, sammañ dazont ar gumuniezh, a c'haller diawlout leun a  
ziaesterioù sed un trevell ma tle kristenion kenlabourat dezhañ.  
D'an dud tolpet er c'hêrioù ma ren un toueziadur ast dic'houzañv-  
edus, eo dav kas ur gannadiegzh a c'hoanag gant ur vraudeuriezh  
vuhez. Na vezo ket ar gristenion, deuet emouiziek ouzh an  
atebegezh nevez-se, digalonekaet er geoded divent ha dizremm.  
Kounaent, avat, Yonaz o hircantren e-barzh Niniv ar gêr vras,  
da embann keloù mat trugarez Doue, harpet en e sempladurezh  
gant komzoù Doue Hollc'halloudek nemetken.

Er Bibl e vez ar gêr allies lec'h ar pec'hed hag  
al lorc'h, brasoni an den, diogel a-walc'h d'e veno, evit ren  
e vuhez hep Doue, ha treiñ zoken e c'halloud a-enep dezhañ.  
Hogen Jeruzalem eo ivez, ar Gêr Santel, lec'h ma vez kejet  
gant Doue, promesa ar Geoded a zeu eus barr an Neñv (8).

#### Ar yaouankiz

13 Gant ar vuhez er c'hêrioù hag an degemmadur  
greantel e teu splann krefen chomet dispis betek-henn. Pehini  
e vo, da skouer, lec'h ar merc'hed ha hini ar yaouankiz er  
bed-mañ oc'h emdreiñ ?  
Dre-holl e vez diaes ar c'hendiviz etre oadourion ha re  
yaouank o tegas iziunadoù, nevezadur, andiogelled evit  
an dazont. Piv ne wel ez eus un andon a genstourmoù  
grevus, a dorroù hag a emzizalc'hioù, e-kreiz an tiegezh  
zoken ? Piv ne wel e sav kudenn hiziv war vodoù an aotrou-  
niezh, war diorreadur ar rezid, war dreuzkas an talvoudoù  
hag ar c'hredennoù, kudenn a sell ouzh gwizioù donañ ar  
gevredigezh ?

#### Lec'h ar vaouez

Heñveladra, e meur a vro, e vez imbouro'het, e-ser  
arc'hadennoù feulz a-wezhioù, da reiñ d'ar vaouez un dezvad  
a lakay termen d'ar gwallziforc'h a zo, hag a savelo kevarzh-  
elezh en he gwirioù ha doujañs d'he briagezh. Ne gomzomp  
ket eus ar falskevatalded a nac'hfe an diforc'hioù merket  
gant ar C'houer E-unan hag a zislavarfe kefridi dibar,  
pouezus, ar vaouez ken en oaled, ken er gevredigezh. E gin,  
e tle an dezvadurioù emdreiñ a-benn diogeliñ he galvidigezh  
dezhi ha war an dro anavezout he dizalc'hted evel personded,  
he gwirioù da gemer perzh er vuhez sevenadurel, armerzhel,  
kevredigezhel ha politikel.

#### Al labourerion

14 An Iliz he deus diskleriet gant lid da geñver  
ar Sened Meur diwezhañ : "Mab-den zo hag a zle bezañ penn-  
aenn, sol ha pal an holl ensavadurioù (9)". Nep den en deus  
gwir da labourat, da ziorren e berzhioù mat hag e berselezh  
dre e vicher, da vezañ gopret en un doare reizh a aotreo  
dezhañ ha d'e diegezh "ren ur vuhez vriek er c'heñverioù  
danvezel, kevredigezhel, sevenadurel ha speredel (10)", da  
vezañ skoazellet pa vez en dienez, klañv pe kozh.  
Mar degemer ar c'hevredigezhioù gwerinek pennaenn ar c'hwelun-  
iaderezh evit difenn ar gwirioù-se, ne vezont ket, evit  
kelo, bepred tuet d'he lakaat da dalvezout. Ret mat eo  
degemer roll a bouez ar c'hwelunioù : o fal eo derc'houez-  
añ rummoù liesseurt al labourerion, reiñ dezho an tu da  
gemer ur perzh reizh e lañs armerzhel ar gevredigezh,  
diorren enno skiant o atebegzh evit a sell ar c'henvad.

An ober a renont n'eo ket aes bepred koulskoude : temptet e vezer gwechoù 'zo da gorvoiñ ur saviad-nerzh a-benn gourlakaat dre an ec'hwel pergen, -hep ma ve dianzavet, anat, ar gwir d'an ec'hwel evel araez-emzifenn diwezhañ-holl, - divizoù re vec'hius evit an armerzh pe ar gevredigezh a-bezh, pe a-benn harpañ arc'hadurioù politikel rik. Dreist-holl pa vez e kont gwazadurioù foran, ret da vuhez pemdeziek ur gumuniezh en he fezh, dav e vo priziañ ar bevennoù na vezint ket tremenet hep ober ur gaou dizegemeradus.

#### Reuzidi an degemmadurioù

15 E berr, araokadennoù zo bet kaset da benn evit lakaat etre an dud brasoc'h yonez ha perzhadur en atebeg-ezhioù. Hogen, war an dachenn divent-se e chom kalz d'ober. Rak-se eo ret kenderc'hel da brederiañ, da imbours'hiñ, da armodiñ, dindan boan a chom daleet e-keñver iziunadoù kant-reizh al labourerion, iziunadoù a eztaolont seul greñvoc'h ma kresk o stummadur, skiant o briedegzh, nerzh o azadurioù.

An emgarantez hag ar vestroniezh zo daou demptadur padus gant an dud. Rak-se eo ret kaout ur skiant-poell lemm-ouzh-lemm a-benn merzout diwar an egin ar saviadoù direizh hag ensevel ur reizhded nebeutoc'h diglok. En degemmadur greantel, o c'houlenn un azasadur herrek ha kendalc'hel e vo ar reuzidi niverusoc'h ha dic'houestoc'h da sevel o mouezh. Cuzh ar "beorion" nevez-se, - tud dilañset pe diazasaet, kozhidi, arlezidi a bep orin - e tamant an Iliz a-benn o anavezout, o harpañ, difenn o lec'h hag o briedegzh en ur gevredigezh kaledet gant ar c'heveser-ezh ha hoal ar berzh.

#### Ar gwallziforc'hioù

16 E-touez an dud a c'housañv an direizhder - ha n'eo ket nevez an anadenn siwazh - eo ret menegiñ ar re a vez gwallziforc'het en abeg d'o gouenn, d'o orin, d'o liv, d'o stuzegzh, d'o rev pe d'o relijion.

A bouez brasoc'h eo ar gwallziforc'h gouennel er mare-mañ en arbenn eus an tennder a zegas ken e broioù 'zo, ken er par etrevroadel. Gant gwir abeg e sell an dud evel digantreizhadus an tech da virout pe da ziazezañ dezvoù pe pleustroù ent reizhiadek war dreuzvarnioù gouenn-elour : holl izili an denelezh zo dezho an hevelep anien, ha dre se an hevelep briedegzh, gant an hevelep gwirioù ha dleadoù diazez, hag an hevelep tonkad dreistnatur. En ur vammvro voutin e rank an holl bezañ kevatal dirak al lezenn, kaout digor kevatal er vuhez armerzhel, sevenadurel, keodedel pe kevredigezhel ha gounit korvo gant un dasparzh reizh eus ar binvidigezh vroadel.

#### Ur gwir da zivroañ

17 Frederiañ a reomp ivez war saviad bresk un niver bras a labourerion divroet, seul ziaesoc'h dezho ren arc'hadurioù kevredigezhel ma 'z int estrenion hag int koulskoude perzhidi diles e strivoù armerzhel o bro degemerer. Mallus eo distremen un emzalc'h strizhvroadelour en o c'heñver ha krouiñ evito un dezvad oc'h anv ar gwir da zivroañ, oc'h aasaat o enbarzhadur, hag o herouezadur micherel, o reiñ dezho an tu da anezañ en ul lojeiz dereat ma kavo plas o ziegezh diouzh ma vo tro (11).

Er rummad tud-se, e vez lakaet ar poblañsoù a

rank kuitaat o bro orin evit kavout gourc'hwel, tec'hout diouzh un drouziwezh, pe un hin re griz, hag en em gav diwrziennet e bro ar re all.

Dlead an holl eo - ha hini ar gristenion pergen (12) - kenlabourat gant nerzh da savelañ ar vreudeuriezh hollvedel, diazez diziouerus ur reizhded diles hag amplegad ur peoc'h padus ; "N'omp ket evit pediñ Doue, Tad an holl dud, mar nac'homp en em ren evel breudeur e-keñver tud krouet diouzh heñvelidigezh Doue. Kenliammet eo an darempred etre an den ha Doue an Tad, gant an darempred etre an den hag e vreudeur ma lavar ar Skritur : An neb na gar ket n' anavez ket Doue (13)".

#### Krouiñ gourc'hwelioù

18 Gant kresk ar boblañs, er broadoù yaouank pergen, e savo er bloavezhioù a zeu niver ar re na zeuont ket a-benn da gavout gourc'hwel hag a zo enket d'an dienez pe d'an arvevadezh nemet adsav e ve da goustiañs mab-den, o reiñ lañs d'ul lusk hollvedel a gengrediezh dre ul leviadurezh efedus a bostadurioù, a urzhiatadur ar c'henderc'h, a genwerzheladur, koulz hag a stummadur. Goñt a ouzomp an akek a vez lakaet da studiañ ar c'hudennoù-se, e-barzh an ensavioù etrevroadel hag e hetomp a-greiz hon c'halon ma ne zaleo ket an izili anezho da reizhañ o oberennoù diouzh o diskleriadurioù.

Nec'hus eo stadañ en domani-se ur meni tonkad-urieghez o reuziañ e-touez an atebion o-unan. Seurt santad a gas a-wezhioù d'an diskoulmoù maltuzour erbedet gant ur bruderezh oberiant evit an diougounañ hag ar sioc'hanañ. E seurt enkadenn, dav eo, e gin diogeliñ en deus an tiegezh,

na o'hell kevredigezh ebet dreist-bevañ heptañ, gwir da vezañ skoret a-benn bleuniañ. Diarvar eo, emezomp en hon c'helc'h-lizher Populorum Progressio, e o'hell ar galloudoù foran emellout, hervez o c'hembeli, dre ur stlennerezh azas hag an diarbennoù rekis, gant ma vo ar re-mañ diouzh al lezenn divezel ha doujus da frankiz reizh ar priedoù. Hep ar gwir dilamadus da zimeziñ ha da gacout bugale, n'eus ket a vrieg-ezh denel (14).

19 Nepred, e mare all ebet, n'eo bet ken gwaskus an ezhomm da imbroudiñ diskoulmoù kevredigezhel. Ret eo gouestlañ dezho strivoù a ijin ha kevalaoù ken bras hag ar re a vez postet evit an armerezh hag ar galvezoniezh. Mar deu an den da goll krog, ma ne ziawel ket e koulz ar c'hudennoù kevredigezhel nevez, e vo ar re-mañ a-raok pell re c'hrevus evit kaout un diskoulm peoc'hiek.

20 E-touez kemmadennoù brasañ hon amzer, e fell dimp menegiñ ar roll bras-ouzh-bras o deus an araezioù-kehentiñ hag o levezon war dreuzfurmidigezh ar speredegezhioù, an anaouedegezhioù, ar frammoù hag ar gevredigezh hec'h-unan. Talvoudus ez int a dra sur e meur a-geñver : bennoz dezho e tegouezh ganimp raktal koulz lavarout ar c'haleier eus ar bed a-bezh oc'h ober d'an holl dud kejañ dreist ar pellder, hag o lakaat elfennoù a unaniezh etrezo holl ; tu zo da skignañ ledanoc'h ar stummadur hag ar stuziadur. Koulskoude dre o levezon end-eeun, e teu an araezioù-kehentiñ kevredigezhel da vezañ ur galloud nevez. Penaos chom hep en em c'houlenn piv eo piaouerion wirion ar galloud-se, pe baliou eo o re, pe hentoù a arveront, pe wered o deus en diwezh e-keñver ar frankizioù hiniennel war an dachenn bolitikel ha kealiadel koulz hag er vuhez kevred-

...se do bras o atebegedh divezel war wirionez ar stlenn a  
skignont war an eznommou a grouont, an ersavioù a zevoudont  
hag an talvoudoù a ginnigont. Muioc'h zo, gant ar skinwel ez  
eus en egin ur moud orinell a anaoudegezh hag ur stuzegezh  
nevez : hini ar skeudenn.

Evel just ne c'hell al levrierion dianadout hag an  
enkrog bras-ouzh-bras o deus an araeziou-kehentinn, hag o  
spletou, pe ar riskloù a zo ganto evit pezh a sell diorren  
hag arackaat ar gevredigezh kebeded.

Dezho da gefleuntian o c'heiridi evit mad an  
holl dre vroudañ ha dre harpañ an hiniennoù hag ar stroll-  
ennoù er o stourm evit difenn talvoudoù diazez mab-den hag  
ar gumuniezh denel. Dezho da stourm diwar-bouez diferedennoù  
azas, ouzh kement tra a yafe a-enep glad boutin an talvoud-  
où a ro e ziazez da arackaat diles ar gevredigezh (15).

#### An amva

21 Tra ma kemm dremmweliad an den hervez ar skeudenn-  
où a zibaber evitan, ez anad un treuzfurmader all, heuliad  
dramaek ha dic'hortoz da oberiantiz mab-den. Trumm e teu  
an den emouziiek outañ : dre forzh korvoñ dizamant an natur,  
emañ e riskl a he drastañ ha da vezañ drastet da heul. N'eo  
ket hepken an amva darvezet a Zou da vezañ un danjer padus :  
saotraderioù ha lastez, klenvedoù nevez, galloud-distrujañ  
diharz ; hogen ivez e gell hiañdur eo a ya diouzh mestroni  
mab-den, o tanben evit warnoñ hoach un amva a vo dic'houzañvadus  
marteze. Kudenn gevredigezhel a bouez bras o sellout ouzh  
familh mab-den a-bezh.

Bus ar gweladurioù nevez-se e tle ar c'hristen  
derc'hel kont, a-benn sammañ, gant an dud all, atebegedh  
war un tonkadur boutin hiviziken.

#### IZIUNADOU DIAZRE HA REDENNOU MENNOZIOU

22 Tra ma pad an arackaat gouezoniell ha kalvezal da  
reverzhiañ dremmweliad mab-den, e zoareoù-anavezout, -labou-  
rat, -beveziñ, -daremprediñ, e vez bepred estalet er saviad  
nevez-se daou iziunad seul grañvoc'h ma kresk e stlennadur  
hag e zeskadur : iziunad d'ar gevarzhelezh, iziunad d'ar  
berzhiadegedh ; daou arvez sus briagezh mab-den hag sus  
e rezid.

#### Spletou ha bevennoù an anzavadur gwirel

23 A-benn fetisaat en devoù hag er frammoù an  
daou iziunad-se, ez eus bet graet gwellaemoù e desrevell  
gwirioù an Den, hag en emglevioù etrevroadel evit dedalves-  
añ ar gwirioù-se (16). Koulskoude e vez bepred oc'h adsevel  
ar gwallziforc'hioù kenel, sevenadurel, relijiel, politikel.  
En devoù, gwirioù an den a chom re alies dianavazet, faest  
soken, pe furrek kreun e chom en doujañs denho. Alies e vez  
al lezennoù war-lerc'h ar saviadoù fetis. Hag int diciouar-  
us, ne spiront ket da ziazezañ kenverioù gwirion a vonsa  
hag a gevarzhelezh. An Aviel, dre selenn dimp ar garitez,  
hon laka da zoujañ d'ar beorion da gentañ ha da gaout  
damant ouzh o saviad dibarek er gevredigezh : ar re bourves-  
etañ a zle dilezel reoù 'zo eus o gwirioù a-benn lakat  
brokusoc'h o madoù e gwazadur ar re all. Rak nar mank, en

tu all da reizhennoù ar gwir, ur skiant donoc'h eus an douj-  
añs hag ar gwazadur dleet d'an nesañ, e c'hall ar gevatal-  
ded dirak al lezenn bezañ un digarez da wallziforc'hioù  
splann, da gorvoerezhioù padus, d'un dismegañs wirion. Anez  
neveziñ an desaverezh a-fet kengrediezh, e c'hell un embann  
dreistmuzul eus ar gevarzhelezh reiñ tro d'an hiniennelouriezh,  
pep hini o tiarc'hañ e wirioù hep sammañ atebeged ebet  
evit a sell mad an holl.

Piv ne wel, war an dachenn-se, degasadenn vras ar  
spered kristen, pa glot hemañ a-hend-all gant iziunadoù an  
den da vezañ karet ? Ar garantez ouzh an den, talvoud  
kentañ an urzh douarel a ziogel ampegadoù ar peoc'h ken  
kevredigehel, ken etrevroadel dre gadarnaat hon breudeuriezh  
hollvedel (17).

#### Ar gevredigezh politikel

24 An iziunad daouek d'ar gevarzhelezh ha d'ar berzh-  
iadegezh, a glask luskañ ur gevredigezh werinek. Meur a  
batrom a vez kinniget, reoù zo en arc'hwel ; hini ebet n'eo  
peurvastus hag an imbourc'h a chom digor etre ar sturiadurioù  
damkanel pe embregel. Ar c'hristen a zle kemer perzh en  
imbourc'h-se koulz hag e frammadur hag e buhez ar gevredigezh  
politikel. Boud kevredigehel, an den a sav e vuhez e ser un  
niver a strolladurioù dibarek, oc'h amplegañ da ziorren ha  
d'en em seveniñ amploc'h, hollveziadel, ar gevredigezh  
politikel. Nep amreal dibarek a rank bezañ savlec'hiet er  
gevredigezh ledanaet-se, ha dre-se war dachenn ar c'henvad (18).

Sed perak eo a-bouez ken bras an desaverezh evit  
a sell ar gedvuhez, ma vez kemennet da bep hini ouzhpenn an  
anaoudegezh eus e wirioù, hini ar c'hendavead anezho : e

zleadoù e-keñver ar re all ; skiant ha pleustr an dlead a  
amleg o-unan an emgenreizh, an asant d'an atebegedhioù ha d'ar  
bevennoù merket da frankiz an hiniennoù pe ar strollennoù.

25 An ober politikel - ha ret eo spisaat ez eus anv eus  
un ober da gentañ ha n'eo ket eus ur gealiadurezh ? - a rank  
bezañ goustennet gant un raktres kevredigezh, kempoell en e  
araezioù fetis hag en e finvezelezh a-geñver gant ur meizadur  
kevan eus galvidigezh mab-den hag eus hec'h eztaolioù ked-  
vuhez. N'eo ket d'ar stad, na da strolladoù politikel kloz  
da c'hourlakaat ur gealiadurezh dre hentoù a gasfe da  
ziktatouriezh ar speredoù, an hini washañ-holl. D'ar stroll-  
adoù sevenadurel ha relijiel eo - en arbenn eus ar frankiz-  
emezelañ a c'houlennont - da ziorren er gevredigezh, diemzamt  
ha dre o hentoù dezho, ar c'hredennoù war natur, orin ha  
finvez mab-den hag ar gevredigezh.

En dachenn-se eo mat degas da soñj ar bennaenn  
bonnet gant Sened Meur Vatikan II : "Ar wirionez ne drec'h  
nemet dre nerzh ar wirionez hec'h-unan o treantiñ ar spered  
gant kement a zouster hag a c'halloudegezh (19)."

#### Kealiadurezhioù ha rezid

26 Rak-se, ar c'hristen a venn buhezañ e feiz e-ser  
un ober politikel, intentet evel ur gwazerezh, ne c'hell,  
anez en em zislavarout, entuañ gant reizhiadoù kealiadel  
enebek en o diazez pe war grefen a bouez ouzh e feiz hag e  
veizadur eus an den : na gant ar gealiadurezh varksour, he  
danvezelouriezh dizoue, he daelerezh a feulster, hag an doare  
he deus da zinac'h ar rezid hiniennel e gounid ar strollennelezh  
en ur zinac'h war un dro pep trehontelevh da vab-den ha d'e

istor personel ha strollennel; na gant ar gealiadurezh frankizour, a gred dezhi gouruhelaat frankiz an hinienn dre lemel diouti pep bevennadur, dre reiñ dezhi da amkan ar c'horvo hag ar c'halloudezh nemetken, ha dre sellout ouzh ar c'hengrediezhoù evel heuliadoù ret an embregadennoù hiniennel, ha n'eo ket evel ouzh ur pal hag un dezverk pennañ eus talvoud-egesh an urzhiadur kevredigezhel.

27 Ha ret eo pouezañ war ar forc'hellegezh a c'hell bezañ gant pep kealiadurezh kevredigezhel ? Gwezh e tire an ober politikel pe kevredigezhel d'un dedalvezadur eus ur mennoz difetis, damkanek rik ; gwezh e vez ar preder ur benveg hep-mui e dalc'h an ober evel un araez bellouriezhel. En eil degouezh hag en egile, daoust ha n'emañ ket an den en arvar da vezañ arallekaet ? Savlec'hiet emañ ar feiz kristen dreist ar c'healiadurezhioù, hag enebek outo a-wezhioù e kement ma anavez Doue, trehontel ha krouer, o c'hervel mab-den, war bep pazennad eus ar grouadelezh, evel rezidek hag atebek.

28 Un arvar a ve ivez reiñ un asant don d'ur gealiadurezh nad eo ket sichennet war ur geennadurezh wirion ha diazezus, kavout repu enni evel en un displegadur termenel ha spirus eus pep tra ha adeiladiñ evel-se un idol nevez a zarbenner an hollredi anezhañ, hep rat a-wezhioù. Ar gealiadurezh-se a hañval katreizhañ an ober, zoken feuls, klotañ gant ur c'hoant hael a wazerezh ; hemañ a van, nemet e vez daspaket gant ur gealiadurezh, o tisoc'hañ a-benn ar fin gant sujidigezh an den, zoken mar kinnig hentoù 'zo a zieubidigezh.

29 Komzet e vez hiziv eus kiladenn ar c'healiadurezhioù ; deuet eo marteze ar mare lañsus d'un digoridigezh war

drehontegezh fetis ar gristeniezh. Ur riskladur brasoc'h e c'hell bezañ ivez etrezek ur soliadegezh nevez : ar c'halvezerezh hollveziadekaet evel oberiantiz pennañ, evel mod hanvout aloubus, evel lavar zoken, hep ma ve dezrannet ar ster gwirion en deus.

#### Al luskadoù istorel

30 Hogen er-maez eus ar soliadegezh-se, o tiren an den d'ur vent hepken - pegen bras bennak e ve hiziv - ha dre-se ouzh e vac'hagnañ e kej ar c'hristen e-ser e ober gant luskadoù istorel fetis deveret eus ar c'healiadurezhioù, ha diforc'h diouto evit ul lod. Yann XXIII, hon diaraogour doujet, a ziskoueze e Facem in Terris ez eus tu d'ober un diforc'h : "Arabab heñvelaat damkaniezhioù faos a-berzh prederourion war natur, orin ha finvez ar bed hag an den ouzh luskadoù istorel o kaout ur pal armerzhel, kevredigezhel, sevenadurel pe politikel, ha pa ve orin ha durc'hadur ar re-mañ en damkaniezhioù-se. Digemm-kaer e vez ur geennadurezh, ur wezh termenet ha diazezet da vat ; al luskadoù, avat, amkaniet war azzioù fetis ha kemmus ar vuhez a vez e dalc'h ar c'hemmadoù-se. A-hend-all, e kement ma klot al luskadoù-se gant sturiannoù yac'h ar poell ha gant iziunadoù reizh mab-den, piv a nac'hfe gwelout enno elfennoù yael ha degemeradus ? (20)".

#### Hoaladur al luskadoù sokialour

31 Hiziv e vez hoalet kristenion 'zo gant al luskadoù sokialour hag o deveradoù liesseurt. Enno e klaskont anaout iziunadoù 'zo a zougont enno en anv o feiz. En em santout a

reont saviadet er redenn istorek-se, ha fellout a ra dezho ren un ober enni. Hogen, hervez ar c'hevandirioù hag ar stuzegezhioù, e vez gant ar redenn istorek-se dremmoù disheñvel dindan an hevelep anvad ; zoken mard eo bet, ha mard eo c'hoazh levezonet e meur a zegouezh gant kealiadurezhioù digenrezus gant ar feiz. Ret eo d'ar gristenion bezañ evezhiek bras. Re alies eo techet ar gristenion dedennet gant ar sokialouriezh d'he derc'hekaat e termenoù hollek-tre : youl da ziazezañ ar yonez, ar gengrediezh, ar gevataliezh. Nac'hañ a reont anvav rediezhoù al luskadoù istorel sokialour a chom kenfurm d'o c'healiadurezhioù-orin. Etre ar gwiskadoù disheñvel eus erzerc'hadur ar sokialouriezh - un iziunad hael hag ur c'hask d'ur gevredigezh yonoc'h, luskadoù istorel, dezho ur framm hag ur pal politikel, ur gealiadurezh o vennout savelañ ur gweladur kevan hag emren eus an den - e ranker lakaat diforc'hioù a heñcho an dibaboù fetis. Koulskoude arabat d'an diforc'hioù-se mont betek ober ouzh ar gwiskadoù-se evel pa vijent disrann ha dizalc'h a-grenn. Al liamm fetis a zo etrezo; hervez an amveziadoù, a rank bezañ spisverket aketus, hag o spiswel a skoazello ar gristenion da zivizout derez o engouestladur en hent-se, lakaet e vo doujet da dalvoudoù, ar rezid pergen, d'an atebegzh, an digradur d'ar speredelezh, a zo gwarant bleuniadur klok mab-den.

#### Emdroadur istorel ar varksouriezh

32 Kristenion all en em c'houlenn zoken hag un emdroadur istorel eus ar varksouriezh na rofe ket tu da nesadurioù war an dachenn. Stadañ a reont e gwirionez un tarzhadur eus ar varksouriezh, ha hi betek-henn ur gealiadurezh unelour, o tisplegañ holltelezh an den hag ar bed en hec'h

argerzh-diorren, ha dre se andouast. Er-maez eus an eneberezh kealiadel o tistrannañ ent kefridiel dalc'hidi ar varksouriezh-leninouriezh en o deveizadur eus preder an diazeourion, er-maez eus ar stourm etre ar renadoù politikel a venn hiziv bezañ soliet warni, tud 'zo a ziforc'h gwiskadoù disheñvel eus erzerc'hadur ar varksouriezh.

33 Evit lod e chom ar varksouriezh dreist-holl un embreg oberiant eus ar stourm a renkad. O kantquezañ feulster an darempredoù a vestronierezh hag a gorvoerezh bepred oc'h adsevel etre an dud, e reont eus ar varksouriezh ur stourm hep-mui, da ren ha da enacuiñ dibaouez. Evit lod, e vo embregerezh-stroll ur galloud politikel hag armerzhel, dindan renerezh un unstrollad a venn bezañ - hag eñ nemetken - an eztaol hag ar gwarant eus mad an holl, o lemel digant an hiniennoù hag ar strollennoù all pep galloud-divizout ha pep dibab. War un trede pazenn, ar varksouriezh - oc'h embreger ar galloud e ve pe get - a ra dave d'ur gealiadurezh sokialour diazezet war an danvez-elouriezh istorek ha war nac'hadur pep trehontelezh. E lec'h all c'hoazh, en en kaver dindan un neuz skañvaet, hoalusoc'h ivez evit ar spered arnevez : un obererezh gouezoniel, un hentenn rik da imbours'hiñ ar beziadoù kevredadel ha politikel, al liamm poellel hag amrouet gant an istor etre an anaout damkanel hag embreg an treuzfurmerezh dispac'hel. Daoust ma vez pouezekaet gant ar patrom-se a zezrannerezh arvezioù 'zo eus ar werc'helezh diwar-goust re all, ouzh o deveizañ e-ser ar gealiadurezh, e pourchas koulskoude da dud'zo ur benveg-labour, un diarvar a-raok taol, hag an emfiziañs da zigejañ, ent ouezoniel, gwikefre emdroadur ar gevredigezh.

34 Mar galler diverzout er varksouriezh buhezset ent fetis, an arvezioù disheñvel-se hag ar c'hudennoù a lakaont

d'ar gristenion war dachenn ar preder hag an ober, ez eo touellus ha dañjerus, avat, ankouaat al liamm strizh a zo etrezo, asantiñ da elfennoù an dezrann marksour hep anzav o darempred gant ar gealiadurezh, embreger stourm ar renkadoù hag an devezadur marksour anezhañ en ur dremen hep merzout fraezh patrom ar gevredigezh hollveliek ha feuls a vez e disoc'h seurt argerzh.

#### Ar gealiadurezh frankizour

35 A-hend-all ez eus un adlañs gant ar gealiadurezh frankizour. Ar redenn-se a glask katreizh pe en anv an efedusted armerzhel, pe evel difenner an hinienn ouzh enkrog war gresk ar frammoù, pe ouzh tuadurioù hollveliek al levierezhioù. Hag a dra sur emañ an intrudu hiniennel da zerc'hel ha da ziorren. Hogen ar gristenion a ya gant an hent-se, daoust ha ne vezont ket techet da zerc'hekaat d'o zro ar frankizouriezh a zeu neuze da vezañ ur bonnadur a-du gant ar frankiz ? Ur patrom nevez a garfent kaout, azasaet ouzh an amveziadoù a vremañ, ankouazhus ma'z int ez eo ar frankizouriezh prederouriek ur c'hadarnadur faziek eus emreded an hinienn, e oberoù, e abegoù hag embreg e rezid. Kement ha lavarout e rankont mont ouzh ar gealiadurezh frankizour gant an deznaderezh brasañ.

#### An deznaderezh kristen

36 Da geñver an doare nevez-mañ da vont ouzh ar c'healiadurezhioù liesseurt, e klasko ar c'hristen en andon e feiz hag e kelennadurezh an Iliz ar pennaennoù hag an

dezverkoù dereat evit chom hep bezañ touellet, ha bac'het da c'houde, gant ur reizhiad a anadfe dezhañ re ziwezhat ar bevennoù hag an hollveliegezh anezhi, ma n'en defe ket merzet e koulz an nammoù-se en o gwrizioù. O vont en tu all da bep reizhiad, hep ankouaat evit kelo an emouestl fetis en arempred e vreudeur, e vo test, dre e zibaboù end-eeun, eus degasaden spesadec ar gristeniezh evit treuzfurmiñ ar gevredigezh (21).

#### Distro an utopiennoù

37 Hiziv gwanderioù ar c'healiadurezhioù a vez merzet fraashoc'h er renadoù ma klasker o dedalvezañ. Sokialouriezh vurevveliek, kevalaouriezh kalvezveliek, gwerinouriezh aotrouniek a ziskouez anat pegen diaes eo diskoulmañ kudenn ar c'henvevañ er yonez hag er gevataliezh. Penaos e c'hallfe e gwirionez ar renadoù-se tremen e-biou d'an danvezelouriezh, d'an emgarantez pe d'an destrizh stag outo dre ret ? Alese un nagennerzh o sevel a bep tu, azon un enkadenn don tra ma tistro pezh a vez anvet an "utopiennoù", a venn diskoulmañ gwelloc'h eget ar c'healiadurezhioù kudennoù politikel ar c'hevredigezhioù arnevez. Risklus e ve dianaout e vez alies ar galv d'an utopienn un digarez evit tec'hout diouzh an trevelloù fetis ha repiñ en ur bed faltaziek. Bevañ en erveziadoù zo un alibi evit dizarbenn an atebegzhioù beziat. Dav eo anzav avat, e teu diwar an dezrannerezh-se eus ar gevredigezh veziat, ur broud d'an empenterezh-der-vantiñ a-benn diverzout er bremañ ar gallusterioù dianav, ha duro'haat etrezek un dazont nevez ; harpañ a ra e-se an dialusk kevredadel dre ar fiziañs a ro da nerzhioù-imbroudiñ spered ha kalon mab-den ; ha ma ne nac'h digoradur

ebet, e c'hell ivez kejañ gant galv ar gristeniezh. Spered an Aotrou, a ro buhez d'an den nevesaet er C'hrist, a eil-penn dizehan an dremmeliadoù ma plij d'e spered kavout e zigelroez, hag ar bevennoù ma plijfe a-walc'h d'e oberiantiz en em glozañ ; un nerzh zo ennañ ouzh e c'hervel da zistremen nep reizhiad, nep kealiadurezh. E-kreiz ar bed e van kevrin an den o tizoleiñ ez eo mab da Zoue, dre un argerzh istorel ha bredel ma vez o stourm hag o pebeilañ redi ha rezid, samm ar pec'hed hag awen ar Spered.

Nerzhadurezh ar feiz kristen a drec'h neuze war jedadurioù strizh an emgarantez. Lusket gant galloudezh Spered Jezuz-Krist, Salver an dud, harpet gant ar Goanag, en em ouestl ar c'hristen da sevel ur geoded denek, peoc'h-iek, yon ha breurek, a ve ur ginnigadenn kavet mat gant Doue (22). Rak "Gortoz an douar nevez, pell a wanaat ennomp an damant da arat an douar-mañ, a zle kentoc'h e atizañ ; korf an tiegezh denel nevez a gresk warnañ, diskeud eus ar c'hantved da zont (23)".

#### Aters skiantoù an den

38 Er bed-mañ ma ren an degemmadur gouezoniell ha kalvezel en laka da risklañ en ur soliadegzh nevez e tiwan un amgred all, donoc'h. Goude strivañ da vestroniañ an natur dre ar poell setu m'en em gav an den evel klozet e-unan en e boellelezh ; dont a ra d'e dro da vezañ danvez ar ouezoniezh. Gant "skiantoù an den" ez eus hiziv ul lañs heverk. Diouzh un tu, e talvezont da gas un dezvarn boniek war an anaoudegezhioù degemeret betek-henn, pa hañvalont bezañ pe re gantouezek pe re zamkanek. Diouzh an tu all, redi an hentennouriezh hag an a priori kealiadel, o degas da

zigenvezañ, a-dreuz ar saviadoù liesseurt, arvezioù 'zo eus mab-den, ha da reiñ dezho koulskoude, un displegadur mennet hollel, pe da nebeutañ un deveizadur a vennfe bezañ hollelaus diwar ur savboent kementadel rik pe anadennel. Seurt direadur "gouezoniell" zo merk un emvennadur arvarus. Pouezekaat evel-se ar c'hraf-mañ-kraf eus an dezrannadur zo muturniañ an den, ha dindan neuze an argerzh gouezoniell, en em lakaat dic'houest d'e veizañ en e hollelezh.

39 Ret eo teurel evezh bras ivez ouzh an ober lusket diwar "skiantoù an den" o krouiñ patromoù kevredadel, a glaskfed gourlakaat da c'houde evel rizennoù kedvuhez amprout gant ar ouezoniezh. Lakaet e vez neuze an den dindan palvatadurioù o sturianañ e c'hoantoù hag e ezhommoù, o taskemmañ e ersavioù ha betek reizhiad e dalvoudoù. Hep mar ebet ez eus aze un arvar bras evit ar c'hevredigezhioù da zont hag an den e-unan. Rak mard emañ an holl a-unan evit sevel ur gevredigezh nevez, en arempred an dud, eo dav gouzout da nebeutañ a betore den ez eus anv.

40 Tizhet emañ ar c'hristen gant emgredoni skiantoù an den muioc'h c'hoazh eget ar re all, met ne vez ket dizarm dirazi. Rak, evel m'henn skrivemp hon-unan e Populorum Progressio, en domani-se emañ degasadenn spesadek an Iliz d'ar sevenadurioù : "Unanet gant gwellañ iziunadoù an dud, hag o c'houzañv diwar o gwelout divastet, e fell d'an Iliz o skoazellañ da vont da benn vat ; setu perak e kinnig dezho pezh a zo diles dezhi : ur gweladur kevan eus mab-den hag an denelezh (24)". Ha ret e ve neuze d'an Iliz nagenniñ argerzh skiantoù an den ha diskuliañ o emvennadur ? Evel evit skiantoù an natur, e laka an Iliz he fiziañs en imbourc'h-se hag e vroud ar gristenion da gemer perzh ennañ (25).

Atizet gant hevelep darvennadur gouezoniell hag ar youl da anavezout gwelloc'h an den, hogen sklerijennet war an dro gant o feiz, ar gristenion o plediñ gant skiantoù an den a voulc'ho un daeladur, da vezañ frouezhus, etre an Iliz hag ar vaesienn nevez-se a zizoloadennoù. A dra sur, ne c'hallio pep diskiblezh savelañ en he dibaregezh nemet un arvez darnel met gwirion eus mab-den ; an hollelezh hag ar ster zo e-maez krap dezhi. E-barzh ar bevennoù-se avat e kefleugn skiantoù an den ur gefridi yael anavezet gant an Iliz. Ledanaat a c'hellont zoken diawelioù rezid mab-den muioc'h eget ma rakweld diwar verzout an amplegadoù. Ur skoazell a c'hallfent degas d'an divezouriezh kevredadel kristen a vo bevennet hec'h amgant, sur a-walc'h, pa vo anv a ginnig patromoù kevredadel ' zo, tra ma vo startaet he c'hefridi-dezvarn ha -distremen o stadañ keñveriegezh ar greadoù hag an talvoudoù a veze lakaet gant ar gevredigezh-mañ-kevredigezh da dermenel ha da enstag ouzh natur mab-den er-eeun. Hag int amplegad dispirus d'un anaoudegezh welloc'h eus mab-den, ar skiantoù-se zo ul lavar kemplezh-ouzh-kemplezh o frankaat muioc'h eget o leuniañ kevren kalon an den ha na ro ket ar respont klok ha termenel d'ar c'hoant o sevel eus don e gaoded.

#### Forc'hellegezh an arakaat

41 Anavezout donoc'h an den a ro tu da zezvarn gwelloc'h ur c'heal a bouez a chom e diazez ar c'hevredigezhioù arnevez, war an dro luskenn, muzul hag amkan anezho : an arakaat. Abaoe an 19<sup>t</sup> kantved, kevredigezhioù Kornog ha meur a hini d'o heul o deus lakaet o goanag en arakaat nevesaet dibaouez, didermen. An arakaat a ziskoueze bezañ

striv-dieubiñ mab-den diouzh redi an natur ha destrizh ar gevredigezh ; amplegad ha muzul ar rezid e oa. Skignet gant an araezioù-stlennañ arnevez ha gant ur c'hoant-deskiñ ha -beveziñ bepred brasoc'h e teu an arakaat da vezañ ur gealiadurezh hollvezant. Diskred a sav evelkent hiziv ken war e dalvoudegezh ken war e zisoc'h. Petra a dalvez seurt klask didrugar d'un arakaat o tec'hout bep tro ma kreder bezañ e c'houezet ? Pa na vez ket mestroniet an arakaat, e lez an den war e c'hoant. Moarvat gant gwir abeg eo bet diskuliet bevennoù ha mestaolioù ur c'hresk armerzhel kementadel rik, ha hetiñ a reer tizhout amkanioù doareadel ivez. Doaread ha gwirionez an darempredoù etre an dud, live ar berzhiadegzh hag an atebegzh zo ken talvoudus e sell dedro ar gevredigezh ha kementad ha diseurtiezh ar madoù kenderc'het ha bevezet. O trec'hiñ d'an hoaladur muzuliañ pep tra, e termenoù evedusted hag eskemm, e keñverioù-nerzhoù ha -lazioù, e fell d'an den hiziv erlec'hiañ ouzh an dezverkoù kementadel-se, paoted ar c'hehentiñ, skignadur an anaoudegezhioù hag ar stuziadurioù, ar c'henarempred, ar c'hendonadur e-ser an ober boutin. Ha n'eo ket an arakaat gwirion diorren ar genouiziegezh a gaso an den da ensammañ kengrediezhioù ledanaet ha d'en em zigeriñ e pep rezid d'an nesañ ha da Zoue ? Evit ur c'hristen, an arakaat a gej dre ret ouzh kevren eskatologek ar marv : marv ar C'hrist hag e zasroc'hidigezh, lusk Spered an Aotrou a skoazell an den da savlec'hiañ e rezid krouus hag anaoudek er wirionez eus pep arakaat, er goanag digerse nemetañ (29).

AR GRISTENION DIRAK AR C'HUDENNOU NEVEZ-SE

Nerzhegezh kelennadur kevredigezhel an Iliz

42 Dirak kement a c'houlennoù nevez e ra an Iliz ur striv-preder evit respont war he zachenn d'an dud o c'hortoz. Ha dibourvez eo an den da ziluziañ e gudennoù hiziv hag int amploc'h ha mallusoc'h eget biskoazh ? Gant e holl nerzh e skoazell kelennadur kevredigezhel an Iliz an dud en o c'hilask. Ma ne emell ket evit dilesañ ur framm roet, pe kinnig ur patrom ragaozet, ne dremen ket koulskoude gant menegiñ un nebeut pennaennoù hollek : emzisplegañ a ra dre ur préder kaset e-kreiz saviadoù kemmus ar bed-mañ, dindan lusk an Aviel evel andon-nevesaat, gant ma vez degemeret e giminiadezh en he fezh hag e kement tra a c'houlenn. Emzisplegañ a ra ivez gant santidigezh dibar an Iliz azonet gant ur youl diemzant da aremprediñ ar re baourañ gant evezh bras. E vad a ra eus ur skiant-prenet lieskantvedel a ro dezhañ an tu da seveniñ e-ser kendalc'hegezh e brederi an nevezerezh taer ha krouus a zo ezhomm gant stad bremañ ar bed.

Evit ur yonez vrasoc'h

43 Chom a ra da ziazezañ ur yonez vrasoc'h e dasparzh ar madoù, ken er par broadel ken er par etrevroadel. En eskemmoù hollvedel e tleer mont dreist d'ar c'heñverioù-nerzh a-benn disoc'hañ gant kenemglevioù evit mad an holl. Ar

c'heñverioù nerzh n'o deus nepred diazezet ar yonez padus ha gwirion, zoken mar ro e degouezhioù 'zo pebeiladur ar savlec'hioù an tu da gengomz aesoc'h. Arver an nerzh a-hend-all a laka da sevel enepnerzhioù, alese an aergelc'h a stourmoù o tiseoc'hañ gant saviadoù a feulster hag a gamm-oberoù (27). Hogen, henn kadarnaet hon eus alies, brasañ dlead a yonez eo reiñ da bep bro an tu da ziorren drezi hec'h-unan, e stern ur c'hevelerezh kuit a bep spered-mestroniañ armerzhel ha politikel. Kemplezh-bras eo a dra sur ar c'hudennoù o sevel e rouestlad ar c'hevamzalc'hioù a vremañ ; rak-se e tleer kacout ar galon da azgwelout en darempredoù etre ar broadoù e-keñver dasparzh etrevroadel ar c'henderc'hañ, aoz an eskemmoù, reolerezh an helvoù, ar reizhiad voneizel - hep ankouaat an oberoù a gengrediezh denegour - da arzañ ivez patromoù-kreskiñ ar broadoù pinvidik, da dreuzfurmiñ ar speredoù evit o c'hizidikaat ouz tevetegezh an dlead etrevroadel, da neveziñ an aozadurioù etrevroadel e sell eus un efedusted vrasoc'h.

44 Dindan vount ar reizhiadoù-kenderc'hañ nevez, e tarzh an harzoù riezal hag e tiwan damanioù armerzhel nevez, an embregerezhioù liesvroadel. Ar re-mañ, en arbenn eus tolpadur ha gwevnded o araezioù, a c'hell kas bellerezhioù emren, hogos dizalc'h diouz al levrierezhioù broadel eleze e-maez reolerezh evit a sell mad an holl. O ledañ o oberiadegezh, e c'hell an aozadurioù prevez-se kas d'ur furm nevez a vestroniezh an armerzh war an dachenn gevredigezhel, sevenadurel ha politikel zoken. Tolpadur reñverek an araezioù hag ar galloudoù diskuliet o'hoazh gant Pius XI da-geñver 40<sup>e</sup> deiz-ha-bloaz Rerum Novarum a zeu dezhañ an neuz nevez.

Kemmañ ar c'halonou hag ar frammoù.

45 Hiziv e c'hoanta an dud en em zieubiñ diouzh an dienez hag an dalc'hiadegzh. An dieubidigezh-se avat a grog gant ar frankiz diabarzh a rankont adkavout e-keñver o madoù hag o galloudoù; ne vez diraezet nemet dre ur garantez trehontus ouzh mab-den ha, da heul, dre ur brested wirion d'ar gwazerezh. Anez da se, henn gwehout a reer betek re, ar c'healiadurezhioù dispac'helañ ne zisoc'hont nemet gant ur c'hemmañ mistri : ur wech staliet er galloud, ar vistri nevez a zaspugn ar brientoù, a vevenn ar frankizoù, a lez direizhioù nevez da ziwanañ.

Rak se e teu kalz tud d'emartesiñ war batrom end-eeun ar gevredigezh. Uhelbal kalz broadoù, er c'hevezerezh ma vezont enebet ha lusket, eo tizhout an damani galvezel, armerzhel, milourel; dre se e skoilhont ouzh desezañ frammoù ma c'hallfed reoliañ lusk an arakaat diouzh brasoc'h yonez, e-lec'h gwashaat an digevatalderioù ha bevañ en un aergelc'h a zisfiz hag a stourm a lak dibaouez ar peoc'h en arvar.

Talvoudegezh kristen an ober politikel.

46 Ha n'eo ket aze ez anad ur vevenn grenn d'an armerzh ? An ober armerzhel, diziouerus ma'z eo, a c'hell, mar bez renet gwazerezh an dud, "bezañ un andon a vreudeur-iezh hag un arouez eus ragevezh-Doue" (28); an dro eo da eskemmoù fetis etre an dud, da wirioù anzavet, da wazadoù

roet, da vriegezh kadarnaet el labour. Hag eñ alies tachenn a genstourm hag a vestroni, ez eo ivez an tu da zigeriñ kendivizoù ha da loc'hañ kenoberoù. Arvar ez eus koulskoude ma sachfe gantañ re an nerzhou hag ar frankiz (29). Setu perak e ranker tremen eus ar par armerzhel d'ar par politikel. A dra sur, gant an termen "politikel" e c'hell bezañ kammgemeredurioù a zleer sklaeriañ, nemet e sant pep hini emañ ar beurzisentez, en tachennoù kevredigezhel hag armerzhel - ken broadel ken etrevroadel - gant ar galloud politikel.

Hemañ, a zo liamm natur ha ret da genstagañ korf ar gevredigezh, a zle kaout da bal seveniñ ar c'henvad. Ren a ra e ober, o toujañ da frankizoù kanteizh an hiniennoù, an tiegezhioù hag ar stolloù gousezadel, war-benn amparañ, gant efedusted hag e gounid an holl, an amplegadoù da dizhout mad diles klok an den, lakaet e-barzh e finvez speredel. Chom a ra etre bevennoù e gembeli, kemmus hervez ar broioù hag ar pobloù. Ren a ra e emelloù gant damant d'ar yonez ha gant gred evit mad an holl ez eo eñ ar c'hred uhelañ evitañ. Ne zilam ket evit kelo digant an hiniennoù hag ar c'horfoù-etre o maeziennou obererezh hag o atebegzhioù, kement a ro dezho an tu da genlabourat evit seveniñ ar c'henvad-se. Rak "pep emelladenn en dachenn gevredigezhel a vez hec'h amkan skoazellañ izili korf ar gevredigezh ha n'eo ket o distrujañ pe o euvriñ" (30).

Hervez e c'halvidigezh, e tle ar galloud politikel gouzout en em zistrobañ diouzh al lazioù dibarek evit intent e atebegzh e-keñver mad an holl dud, zoken en tu all da harzoù ar riez. Kemer a-zevri ar politikerezh en e bazennoù diseurt, - lec'hel, rannvroel, broadel, bedel, - eo embann dlead an den, pep den, da anaout ar werc'halezh fetis ha talvoudegezh ar frankiz-dibab kinniget dezhañ da glask seveniñ a-gevret mad ar geoded, ar vroad, an denezh. Ar

politikerezh zo un doare darvennus, - n'eo ket an hini nemetañ - da vuhezañ an emouestl kristen e gwazerezh an dud all. Hep diluziañ moarvat an holl gudennoù, e striv da zegas diskoulmoù da gudenn an darempredoù etre an dud. Ne zispella ket an emelloù all diouzh an domani ledan hag engronnus ez eo e hini. Un dañjer bras e ve an emzalc'h aloubus o tennañ d'ober anezhañ ur peurvoud. En ur anaout emrended ar werc'h-elezh politikel, ar gristenion gouvennet da gemer perzh en ober politikel a strivo da glask ar c'hempoeall etre o dibaboù hag an Aviel ha da zougen, e-kreiz ul liesegezh kantreizh, un testeni, personel ha strolennel, eus siriusted o feiz dre ur gwazerezh efedus ha diemzant evit an dud.

#### Rannadur an atebegzhioù

47 An tremen d'ar par politikel a glot ivez gant ur goulenn a-berzh an dud a hiziv : astenn rannadur an atebegzhioù hag an divizoud. Kreskiñ a ra an iziunad kantreizh-se bep ma sav ar barr-stuziadur, ma tiorre skiant ar rezid, ha ma verzha gwelloc'h an den penaos, en ur bed digor war un dazont diasur, emañ endec buhez warc'hoazh e dalc'h dibaboù hiziv. E Mater et Magistra (31), e verke Yann XXIII na pegement ez eo ar perzhiañ en atebegzhioù un darvennad-diazez eus anien mab-den, un embregadur eus e rezid, un hent d'e ziorreadur, hag e tiskoueze penaos e tlee, en armerzh hag en embregerezhioù pergen, seurt perzhiañ bezañ diogelet (32). Hiziv ez eo eo 'honoc'h an dachenn, p'en em astenn d'ar maeziennoù kevredigezhel ha politikel ma rank bezañ ensavet ha kreñvaet rannadur poellek an atebegzhioù hag an divizoud. A dra sur ez a kemplezh-ouzh-kemplezh an disentezioù da gemer; paot-ouzh-paot an amselledoù da

lakaat e penn-kont, darvoudus-ouzh-darvoudus an heuliadoù da ziawelout, zoken mar striv gouezoniezhoù nevez da skoazellañ mab-den war hent e rezid er mareoù pouezus-se. Koulskoude, daoust d'ar bevennoù a ranker lakaat a-wechoù, ne zle ket ar skoilhoù-se gorregeañ emled ar perzhiañ en divizoud koulz hag en dibaboù o-unan hag en erounezadur anezho. War-benn kempouezañ ur galvezveli o kreskiñ, e ranker ijinañ furmoù a werinelezh arnevez, dre reiñ da bep den an tu da gaout n'eo ket hepken stlenn hag eztaol hogen ivez perzh er genatebeg-ezh. E-se e teu ar strolloù tud tamm-ha-tamm da vezañ kumuniezhoù a genrann hag a vuhez. E-se ar rezid, e-lec'h bezañ evel ma'z eo alies un arc'hadur a emrended enep frankiz an hentez, a c'hell bleuniañ en e werc'h denel donañ a zo anezhañ emouestladur hag emroadur evit krouiñ kengrediezhoù oberiant ha buhez. Ar c'hristen a oar avat ez eo dre en em goll e Doue dieuber e kav mab-den e rezid gwirion, nevesaet e marv hag e dasorc'h an Aotrou.

## GALV D'AN OBER

Ar ret emouestlañ d'an ober

48 E tachenn ar gedvuhez ez eus bepred fellet d'an Iliz kefleuniañ div gefridi : sklerijennañ ar speredoù evit o skoazellañ da zizoleiñ ar wirionez ha da zeznadiñ o hent e-touez ar c'helennadurezhioù diseurt kinniget dezho; kemer perzh en ober ha skignañ, gant damant gwirion d'ar gwazerezh ha d'an efedusted, nerzhoù an Aviel. Daoust ha n'eo ket evit chom feal d'ar youl-se he deus an Iliz kaset e-touez al labourerion gant ur gefridi a abostolerezh, beleion o rannañ penn-da-benn dere ar vicherourion ha mennet da vezañ testoù eus he damant hag hec'h imbourc'h ?

An holl gristenion a c'halvomp start adarre d'an ober. En hon c'helc'hlizher war diorreadur ar pobloù e pouezemp evit ma stagfe an holl gant al labour : "D'al liked evit gwir eo da gemer war o c'hont evel un trevell dicout, reneveziñ urzh ar gevredigezh; rak mard eo kefridi an urzhaz kelenn ha desteriañ diles ar pennaennoù divezel war dachenn-se, ez eo roll al liked, dre gemer divizoù en o fankiz hep gortoz abaf titouroù ha sturioù, intrañ gant ar spered kristen speredegezh ha stuzioù, lezennoù hag emframmoù ar gumuniezh ma vevont " (33). Da bep hini d'en em ensellout a-benn gouzout petra en deus graet betek-nenn ha petra en defe d'ober. N'eo ket a-walc'h kounaat pennaennoù, kadarnaat ratozhioù, lakaat a-wel direizhoù euzhik ha garmiñ kehuzadurioù diouganus : ar

c'homzoù-se n'eo devo gwerc'h nemet mard eont a-gevret evit pep hini gant un emskiantiñ lemmoc'h ouzh e atebegzh ha gant un ober gwirion. Re aas eo teurel bec'h an direizhoù war ar re all, ma ne verzer ket war un dro penaos ez eur an-unan kengiriek dezho ha penaos ez eo diziouerus an emzistro personel. Seurt uvelded-diazez a lamo pep reuted ha pep strizhded eus an ober, a bellay ivez an digalonekadur rak ul labour a ziskouez bezañ dreistmuzul. Goanag ar c'hristen a zeu dezhañ da gentañ eus gouzout emañ an Aotrou o labourat ganimp er bed, o kenderc'hel en e Gorf ez eo an Iliz - ha drezi en denelezh a-bezh - an Daspren kefleuniet war ar groaz ha disoc'het gant trec'h splann beure an Dasorc'h (34). Dont a ra ivez eus gouzout ez eus tud all o labourat da gas obererezhioù kenbal a yonez hag a beoc'h; rak dindan un neuz diseblant ez eus e kalon pep den ur youl a vuhez vreurek hag ur sec'hed a yonez hag a beoc'h a zleer lakaat da vleuniañ.

49 E-se, e-kreiz liesseurted ar saviadoù, ar c'hargoù, ar frammoù, e rank pep hini lec'hiañ e atebegzh ha deznadiñ, e pep kenouiziegezh, an oberoù ma'z eo galvet da labourat. Emellet e redennoù diseurt, ma en em sil, e-tal iziunadoù kantreizh, durc'hadurioù forc'hellekoc'h, e rank ar c'hristen dibab gant evezh ha diwall a vont e kenlabourezhioù dreistdiviz ha kontrol d'an denegezh wirion, ha pa vije en anv kengrediezhoù buhezet diles. Rak mar fell dezhañ kaout ur roll spesadek evel kristen reizh diouzh e feiz - roll a c'hortoz an digredennoù o-unan digantañ - e rank strivañ, e-ser e emouestladur en ober, da welout sklaer en e abegadurezh, da zistremen an amkanioù merket dre berzh ur gweladur meizusoc'h a bellay dañjer ar goubarzhegezhioù emgar hag an hollveliezhioù mac'hom.

### Lieselesh an dibaboù

50 En degouezhioù fetis hag o terc'hel kont eus ar c'hengrediezhoù buhez gant pep hini e ranker anaout ez eo kanteizh lieselezh an dibaboù. Un hevelep feiz kristen a c'hell kas da emouestladurioù disheñvel (35). An Iliz a bed an holl gristenion d'un emell daouek luskañ ha neveziñ war-benn ober d'an emframmoù emdreiñ evit o azasaat diouzh an ezhommoù gwirion a vremañ. Digant ar gristenion aet da geneberion evit ur gwel dre berzh o dibaboù disheñvel e c'houleñ strivañ da gompren an eil savlec'hiadoù hag abegoù egile; an ensell leal graet gant pep hini war e c'hreadoù ha war o reizhded a atizo ennañ un emzalc'h a garantez donoc'h o tegas fiziañs e gallusted ar c'hengejañ hag an unaniezh hep ober dianaout an diforc'hioù. "Rak kreñvoc'h eo ar pezh a unan ar feizidi eget ar pezh o disrann" (36).

Kalz tud, gwir eo, sterniet en emframmoù ha bac'het en darblegadurioù arnevez, a vez delanvadet gant o boazioù-dezeviñ, o c'hargoù, pa n'eo ket gant diwallerezh o lazioù danvezel. Re all a gantaez ken don ar c'hengrediezhoù renkadel pe sevenadurel ma teont da zegemer en o fezh barnadennoù ha dibaboù o metou (37). Pep hini n'en devo ken mennad nemet en em amproiñ e-unan ha diorren ar rezid gwirion-se hervez ar C'hrist o tigeriñ hent an hollveziadelezh zoken e-kreiz an degouezhadoù unveziadelañ.

51 Aze ivez ez eo an aozadurioù kristen, en o furmoù diseurt, atabek war an oberiadegezh strolleñ. Hep kemer lec'h ensavadurioù ar gevredigezh keodedel, o deus da eztaol- iñ, en o doare hag o tistremen o gouberzhelezh, darvennadoù

fetis ar feiz kristen a-fet treuzfurmidigezh reizh, ha dre se ret, ar gevredigezh (38).

Hiziv muioc'h eget biskoazh ne vo Komz Doue evit bezañ kemennet ha klevet nemet mard a en ur ser gant testeni galloudezh ar Spered Glan o labourat en oberoù ar gristenion gwazerion o breudeur el lec'hioù end-eeun ma vez divizet o bezoud hag o dazont.

52 O fiziout emoc'h ar prederiadennoù-mañ, e ouzomp ervat, Aotrou Kardinal, n'hon eus ket pledet gant an holl gudennoù kevredigezhel a sav hiziv dirak an den a feiz hag an dud a youl vat. Bezant e chom c'hoazh er speredoù hon diskleriadurioù diwezhañ, - lakaet ganto ho Kiminiadezh da geñver derou eil dekvloaziad an diorreadur, - a-zivout dileadoù an holl vroioù dirak kudenn c'hrevus diorreadur kevan ha kengret mab-den. Ar re-mañ a gasomp deoc'h en amboaz pourchas da Guzul al Liked ha d'ar C'hengor Pabel "Tonez ha Feoc'h" elfennoù nevez koulz hag ur galonekadenn evit ma talc'hfent gant o c'hefridi "dihuniñ Pobl Doue d'un intenter- ezh klok eus he roll hiziv an deiz" ha "kentradiñ an abostol- erezh er par etrevroadel" (39).


Gant an dezoù-se eo e roomp deoc'h, Aotrou Kardinal, hon Bennozh abostolal.

E Vatikan, d'ar 14 a viz mae 1971.

N Ò T E N N O Û

- (1) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 10; AAS 58 (1966), p. 1033.
- (2) AAS 23 (1931), p. 209 hh.
- (3) AAS 53 (1961), p. 429.
- (4) AAS 59 (1967), p. 258.
- (5) *Ibidem* 1; p. 257.
- (6) Kv. 2 Co.4,17.
- (7) Kelc'hlizher *Populorum progressio*, 25; AAS 59 (1967), p. 269-270.
- (8) Kv. Apoc. 3, 12; 21, 2.
- (9) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*; 25; AAS 58 (1966), p. 1045.
- (10) *Ibidem*, 67; p. 1089.
- (11) Kelc'hlizher *Populorum progressio*, 69; AAS 59 (1967), p. 290-291.
- (12) Kv. Rm 25,35.
- (13) Diskleriadur *Nostra Aetate*,5; AAS, 58 (1966), p. 743.
- (14) AAS 59 (1967), p. 276.
- (15) Deved *Inter Mirifica*, 12; AAS 56 (1964), p. 149.
- (16) Kelc'hlizher *Pacem in terris* : AAS 55 (1963), p. 743.
- (17) Kv. Kiminiadezh evit Devezh hollvedel ar peoc'h : AAS 63 (1971), p. 5-9.
- (18) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*,74; AAS 58 (1966), p. 1095-1096.
- (19) Diskleriadur *Dignitatis humanae*,1 :AAS 58 (1966), p. 930.
- (20) 159 : AAS (1963), p. 300.
- (21) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 11 :AAS 58 (1966), p. 1033.
- (22) Kv. Rm 15, 16.
- (23) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 39 : AAS 58 (1966), p. 1057.
- (24) 13 :AAS 59 (1967), 264.
- (25) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 36 : AAS 58 (1966), p. 1054.
- (26) Kv. Rom 5,5.
- (27) Kv. *Populorum progressio*, 56 hh. : AAS 59 (1967), p. 285 hh..
- (28) *Ibidem*, 86, p. 299.
- (29) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 63 : AAS 58 (1966), p. 1085.

- (30) *Quadragesimo Anna* : AAS 23 (1931), p. 203; kv. *Mater et Magistra* : AAS 53 (1961), p. 414, 428; Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 74, 75, 76 : AAS 58 (1966), p. 1095-1100.
- (31) AAS 53 (1961). p. 420-422.
- (32) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 68, 75 : AAS 58 (1966), p. 1089-1090, 1097.
- (33) Kv. *Populorum progressio*, 81 : AAS 59 (1967), p.296-297.
- (34) Kv. Mt 28, 30; Ph 2, 8-11.
- (35) Kv. Bonreizh pastorel *Gaudium et spes*, 43 : AAS 58 (1966), p. 1061.
- (36) *Ibid.*, 93, p. 1113.
- (37) Kv. 1 Th 5, 21.
- (38) Kv. *Lumen gentium*, 31 : AAS 57 (1957), p. 37-38; deved *Apostolicam Actuositatem*, 5 : AAS 58 (1966), p. 842.
- (39) *Motu proprio "Catholicam Christi Ecclesiam"* : AAS 59 (1967), p. 27 ha p. 26.



Koumanant 12 niverenn (*Geriadur Istorel e-barzh*) . . . . . 60 F  
Koumanant da 6 Rann eus ar Geriadur Istorel . . . . . 60 F

Renner : G. ETIENNE  
Embanner : G. CHEREL  
Sekretouriezh : PREDER, 30, Place des Lices, 35000 RENNES

An arc'hant da : PREDER, C.C.P. 16 093 13 PARIS

Priz ar c'haier-mañ : 6 F

*Moulet gant SADED  
C.P.A.P. N° 35 709  
Diskleriet hervez lezenn, trede trimeziad 1972.*

